

ARC'HVREURIEZ

ANN


ITRON - VARIA A ESPERANS ,

SAVET

e **sant-Briek (Côtes-du-Nord),**

dre Lizer Apostolik euz hon Tad santel ar Pap PIE IX.

(8 Eost 1848.)



Billed a rôer d'ar re en em laka er vreuriez.

Enn amzer a anken dreist holl , hag e-kreiz ann trubuillou , ec'h anaver ann ezom euz eur sicour krenv ; pa vé nec'h braz gand ann den ha lec'h da gavet, neuze eo en deuz ezom da esperout. — Pe sort galloud , pe sort espérans ; enn tu all da zikour Mari ? Ha n'eo ket Mari hon diveall diouz pep droug, à *periculis cunctis*? Ha n'eo ket Mari a zo saludet gand ann Iliz dindan ann hanb benniget a *Esperans* ann dud , *Spes nostra* , *salve* ? Ha n'eo ket d'ezhi eo dleet ar gomz-man euz ar Skrijo sêkr : « *Ego Mater..... sanctæ spei.* » Me eo ar vam euz ann Esperans-zantel. — Hi eo eta a bedfomp: lakât a refomp Anezhi da gaout truez ouz hon poaniou-ni, o tond gant-hi da gemer lod e poaniou Jesus, he Map benniget, ha krenvêt gant ho miritou et kasefomp d'ann env eur beden nerzuz, ha distrei a refomp brec'h Doue savet evit skei var-n-omp — Mari a zivoall ar Franc a zo bet roet d'ezhi hag a zo en em c'hoestlet d'he servij. Ha mar d'eo braz hon pec'hejou, gouzout a reomp ez eo holl c'halloudeg e-kichen Doue hell-c'halloudeg. —

Ar grasou barzuduz a skuill bemdez var ann iliz e pe-lec'h eo bet savet ar vreuriez, a ziskouez sklêr penôz e selaou hon pedennou, hag e ma digor he daoulagad var-n-omp ha var hon bro ger.

Ne beder ket ann Itron-Varia a Esperans hep beza selaouet.

Tennet euz ar Statujou.

ART. II. Ann oll gatoliked a zo galvet d'en em lakat er vreuriezh-man — (Pie IX he-unan hag he Gardinaled ho deuz lakat ho hano e-touez ar c'henvreuder).

ART. III. Ar grasou a c'houlenner er vreuriezh a zo :

Brasa mad ann Iliz zantel ;

Silvidigez ha peoc'h ar bed katolik , ar Franz dreist holl ;

Conversion ar bec'herien ;

Perseverans ar re just ;

Maro mad ar c'henvreuder ;

Dilivrans ann ineou a zo er purgator.

ART. IV ha V. A-unan gant kalon zantel Mari o kemer lod e poaniou Jesus , ar c'henvreuder a lavar bep mintin ar beden *Salve Regina*.

ÿ. Dignare me laudare te , virgo sacrata.

Plijet gan-e-hoc'h e teunin d'ho meuli, Gwerc'hez zantel.

ñ. Da mihi virtutem contra hostes tuos.

Roit nerz d'in enep hoc'h enebourien.

ÿ. Benedictus Deus in sanctis suis.

Doue da vezo meulet enn he Zent.

ñ. Amen.

Evel-se bezet grêt.

ÿ. Sancti sodalitatis patroni.

Zent patroned euz ar vreuriezh.

ñ. Orate pro nobis.

Pedit evid-omp.

Bep noz e larer *Sub tuum* gand ar pedennoù all laket amañ diarôg.

Ar re ne c'houzont ket pe ne c'hellont ket lenn sr pedennoù-ze a lavar er memes intantionon diouz ar mintin ar *Bater*, diouz ann noz ann *Ave Maria*.

Gonid a reont ann induljansou evel ar re all.

ART. VI. Eunn aluzen a seiz gwennek bep bloaz enn enor da seiz glac'har Mari a c'houlenner digand ar c'henvreuder a blij d'ezho rei kement-sé.

D'ar re a ro ann aluzen-ze e kaser eur *presant* hag a dall tost da gemend-all, gant ma vezint dastumet dre rummad a zek den, a ugent, pe muioc'h.

Fondation evid ar re veo.

Meur a hini evid kaout lod da viken e pedennoù ar vreuriezh a

ro eur wech evid mad — 7 livr.
Eunn *titr* a gevreur a ve roet d'ezho.

Fondation evid ar ve caro.

Ann aluzen-ze a 7 livr, eur wech roet, enn intention unan maro, pe ve bet er vreuriez pe ne ve ket, a ra d'ezhan kaout lod da viken enn ofern, lavaret bemdez, var ôter ann Itron-Varia a Esperans.

ART. X. Pedit a rer ar c'henvreuder da dostât ouz ar sakramanchou, da oeliou ar vreuriez dreist oll.

Ar goel brasa a rer ann III sul a viz guengolo, d'e goel ann Itron-Varia-a-Druez.

Goude ar Werc'hez zantel, ar vreuriez a enor dreist oll S. Josef — S. Per ha S. Pôl — S. Jakes-ar-Major — S. Yañ-Badezour — S. Mikel — ann Elez-mad — Stes Anna — S. Lofs roue Franç — Stes Genovefa — S. Georj, patron a Vro-Zaoz,
Goel ar Rouane a zo ive unan euz he goeliou.

ART. XI. Indulgansou plenier ar vreuriez.

1° Ann dé m'en em laker ar vreuriez, pe, mar kaver guell, unan euz ar seiz dé goude;

2° D'ann oll oeliou euz ar Werc'hez vari;

3° Da oel ann oll-zent;

4° Da oeliou ar zent patroned, hanvet diagent, pe eunn de bennag e-pad ho eisved.

5° Daou sul dre viz.

6° Eur wech ar miz, gant ma ver bet teir gwech enn ofern d'ar sadorn, pe teir gwech e pedennou ann Arc'hvreuriez.

7° Eunn heur euz ar maro.

Indulgansou bihan.

1° Seis vloaz ha seis daou-ugent dé, ar suliou ha ne c'honneur ket ann induljans plenier lavaret di-agent enn n° 5.

2° 100 dé ken a-lies gwech ha m'en em gaver er pedennou a leverer d'ar sadorn bep sun pep d'ar sul kenta euz ar miz.

3° 100 dé, ann oll deiou euz ar bloaz.

4° 60 dé, evit peb ober mad a ra eur c'henvreuer gant keñn euz he bec'hejou.

Pidi a reomp hon c'henvreuder da ober (herve intantion Pie IX) ma-kresko hou breuriez, o rei da anaout ar madou braz a gaver enu-hi.

Ho fidi a reomp ive da rei d'eomp eun anaoudegez guirion euz ar grason deuet dre intercession ann Itron-Varia-a-Esperans.

Induljansou all.

A C'HONER O PIDI ENN ILIZ ANN ITRON-VARIA-A-ESPERANS

PETRA DENNAG NE VER KET ER VREUKIEZ.

- Induljans plenier, eur wech er bloas d'ann de ma karer.
- Induljans a 500 dé, eur wech er bloaz.
- Induljans plenier d'ar re a heuil prosesion ann Itron-Varia, ann 31 a viz maé.
- Induljans plenier eun dé bennag, (herve choas pep-Lini) épad ann eisved euz ar goeliou a rer enn enor da S. Per ha da S. Pól, ann 18 ha 25 a viz genver, ann 29 a viz even ha 1 a viz east.
- Induljans a 300 dé, enn oll deïou all euz ann eisvedou-zé.
- Induljans plenier ann oll deïou euz ann eisved a rer da zé ha bloaz Kurunidigez ann Itron-Varia a-deleg ann 30 a viz gouéré beteg ar 6 a viz east.

Induljans a 50 dé, ken a-liez gwech a ma poker da droad S. Per. Galloud a rer gonid evid ann anaon ann oll induljansou-zé.

Gwelet hag aprouet.

† AUGUSTIN,

Eskop a S. Briek ha Lan-Dreger.

N

a 20 bet arrolet dindan baniel ann Itron-Varia-a-Esperans
ha digemeret enn Arc'hevreuriez ar a viz 18

P. M. Prudhomme
Chc. de St. Briek